

KAN

AR GOUKOU.



War donio 2 ha 3 *Dom Herri.*

Pa oa er park Iann ha Gwillou,
Tost d'he e kanaz ar goukou.
— O! ar goukou! 'me Gwillaouik;
Ma bennoz roann d'he mouezik.

Evido-me e deuz kanet;
Ar c'hentan am euz hi c'hlevet.
— Koz-tamm-ludu, serr da c'henou;
Vidonn neuz kanet ar goukou. —

Eunn denik dall, oa klask he voet,
O tremen en deuz ho c'hlevet.
— Teurveet, 'mean, ma chelaou
Ma larinn dac'h eur gir pe daou.

N'en em gannet ket, potret kez;
Mar keret vo berr ho prosez :
Et da gad ar barner war ze,
Gantan klevfet ar wirione.

— Heuillomp ali ar paour-kez-dall
Ha demp ti ar barner raktal. —
Enn eur gambr vraz, leun a baper,
Tost d'an dol, e oa ar barner.

Enn eur gador oa azeet
Hag hen zonn ha dic'hoarz meurbet;
Ne ket red lavaret penoz
Oa war he fri lunedo koz.

— Otro barner, ha c'houi so iac'h?
Na mad bepret ar bed genac'h?
— Tud iaouank, evel ma welet,
Mes kouskoude iac'hoc'h on bet.

— Ni zo deut hon daou d'ho kavet,
Evit petra? Ne ouzoc'h ket.
— Leret d'in ha me c'houveo
Ha gwellan m'hellin me raio.

— Ni zo deut d'ho kavout hon daou
Da glask gout ar gwir hag ar gaou.

— Ar gwir hag ar gaou c'houveer
P'am euz komzet, ann dra zo skler.

— Ma! Ni oa dec'h, etal al lann,
Tost d'ar roc'h, o troc'han baelann;
Ha chetu raktal ar goukou
Neuz kanet evidon, otrou.

— Evidon oa, gaouiad divez;
N'hen c'hredet ket, ma otro kez.

— Peuc'h! konnaret ket kement-all,
Pe me ho kaso kuit raktal;

Komzet ann eil goud'egile,
Pe a hend-all, et da vale;
Red eo d'eur barner klevet mat
Ma c'hello goude barn er-vat. —

Pa oent bet eta chelaouet
Ho daou evel ma oa gleet :
— Rok mont pelloc'h, potret, 'mean
Me laro dac'h eur gir breman :

Tolet aze daou bez daou skoet
Hag ho prosez a vo barnet. —
Ha chetu arc'hant war an dol
Hag ar barner d'he skrapan oll.

Neuze zav he vouez eunn tammek :
Da laret d'ann daou c'henaouek :
— N'eo ket evid Iann na Gwillou,
Vidon neuz kanet ar goukou. —

O vont kuit hi lare : « Ia vat,
« Kanet neuz evitan, gwir mat. »
Kanet, kanet, koukou. bep bla,
Ha c'houi, tud zot, lipet ho loa.

(Euz levr *Bleuniou-Breiz.*)

